

KOTOGOTOGOG

Eur zen-c'heariell hag a vez kanet e Plougin
ha tre-var-dre d'an eureujou



I

Allegretto

Eur c'haner, hebken.

Adkanet gant an holl.

Di. sul me vô pin. vi. dik Di. sul me vô pin.
. vi. dik Pa'm hô pre-net eur ya-zig Pa'm
bo pre-net eur ya-zig Graggraggrag e
me va yar koto goto gog e. me'v c'hil. log.

War don ar c'houblad kenta.

II

Disul me vô pinvidik, disul me vô pinvidik,
Pa'm hô prenet eur c'hiig, pa'm hô prenet eur c'hiig.

Eur c'haner.

Adkanet gant an holl.

Aou, aou, aou, e. me va c'hi grag, graggrag e.
me va yar koto goto gog e. me'v c'hil. log.

III ⁽¹⁾

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur c'hazig.
Bismignaon, eme va c'haz,
Aou, aou, eme va c'hi etc.

IV

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur marc'hig.
Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h,
Bismignaon, eme va c'haz, etc.

V

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur vioc'hig.
Man, man, man, eme va bioc'h,
Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h, etc.

VI

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur maoutig.
Bê, bê, bê, eme va maout
Man, man, man, eme va bioc'h, etc.

VII

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eun doc'hig.
Oc'h, oc'h, oc'h, eme va doc'h,
Bê, bê, bê, eme va maout, etc.

(1) *Ar c'houblad-man hag ar re a deu d'e heul a vô kanet er memez doare gant an daou genta. Ne vô ker diezamant nemed gant an trede poz eus peb hini arezo, rag neuze ar mestr-kaner, hag an holl war e lerc'h, a ranko henvel eul loan muioc'h bep taol, en eur vont var ar c'hiz: eno ema ar c'hoari; eno e vô an abadenn, ha kalz a vô laket nec'het araok ma vô ar mare da gana: Kotogotogog, eme 'r c'hilhog.*